

BREIZ-IZEL

D'am mignon an otro MENGUY, person Coatascorn.

A musical score for 'BREIZ-IZEL' in 6/8 time. The score consists of three staves of music with corresponding lyrics in Breton. The lyrics are:

Gant mor e - vel gou - riz tro - zro, Na kaer ec'h
eo Breiz hon Mam - Vro ! Bro ar gwe derw ar vein ka-
let ! Bro an tou - rio dan - te - le zet !

Gant mor evel gouriz tro-zro,
Na kaer ec'h eo Breiz hon Mam-Vro !
Bro ar gwe derw, ar vein kalet,
Bro an tourio dantelezet !

Bro 'lec'h ez eus trouienno glas,
Tosenno koant ha koajo bras,
Bruk, lan melen er lanneier,
Ha gwiniz kaer er parkeier !

Milino koz 'hed ar sterio,
En o c'lichen dalc'h-mad skluzio,
Dour o trouzal 'vel kounnaret,
Da vont 'n e hent, pa ve harzet !

Gwenojenno ha hencho don,
'Lec'h alies e red gedon,
Kleuzio uhel 'tre ar parko
'Lec'h kan an env war ar branko.

O kas o zaout war ar maezio,
Pôtred vihan gant o sonio,
Sonio ken koant ma ve laret
Eo gant Ele 'vent richanet.

Mouez an hekleo 'barz an draouien,
O tizrevel ar ganerien,
Ha mouez ar c'hi à renk harzial,
An disteran 'klevo trouzal !

Met deut breman da dal ar mor,
Eus an Argoat deut d'an Arvor,
Ewit gwelet ar gwagennio,
O 'n em zrailhan war hon aocho !

Neblec'h ar mor na sko ken gwaz,
Neblec'h muioc'h na c'hoari vaz ;
Labour 'nevo c'hoaz da beilhet,
Roc'h Breiz-Izel a zo kalet !

Gant ar roc'h-ze eo e savet
Hon zourio koant dantelezet,
Tourio uhel 'vel bizied,
'Trezek an env dalc'h-mad troet !

Stank e kaver en Breiz-Izel
Kroaz-venerez, iliz, chapel !
Labour ar fe, fe hon zado,
'Deus gret kement a vurzudo !

Dre-oll, diouz krap an tosenno,
Pe guzet 'kreiz an traouienno,
Eun iliz vrao pe eur maner,
'Didu lagad an tremener !

Diouz ar mintin ha da zer-noz,
'Hed an draouien hag 'us d'ar roz,
'Klewer o son an anjeluz,
O hirvoudi ar glaz klemmus !

Ha d'ar zulio mouez ar c'hleier,
Joausoc'h kals o vont dre 'n er,
Evel douget gant an awel,
'Chalw d'o iliz tud Breiz-Izel !

'Met eun dra c'hoaz 'glewer en Breiz,
War ribl ar mor kouls ha 'n he c'hreiz,
Breiz 'deus eur yez, ar Brezoneg,
« Yez an dud vad ha kalonek ! »

Eur yez dispar 'halfe bean,
O ya, Mam-gunv da nebeutan,
Mam-gunv da yez ar C'hallaoued,
Ha da gals c'hoaz komzet er bed !

O Bretoned, karet ho pro ;
Miret erfad, ha war eun dro,
Ho kizio koz, ho yez, ho fe,
Bet gwir-Vreiziz en han' Doue.